

KANTIKOU BREZONEK


Tennet euz levr Eskopti S. Briek ha Landreger

(GANT AOTREADUR)


Mari Rouanes Breiz-Izel.



1. Kanomp a vouez u-hel Mari, Mam Doue : Rouanes Breiz-l-izel Hag hon Diskan.



Mam i-ve. Da Vari Meuleudi E pevar c'horn ar vro ! Hon Breiz-ni Zo



dezi, Ha dalc'hmad e vezo.

- | | |
|---|---|
| 2. En o ol bedenou,
Gwerc'hes beniget,
E vec'h e kalonou
An ol Vretonet. | E laromp teir Ave
D'eoc'h-hu, Mam Jezus. |
| 3. Bep mintin ar poaniour,
D'an daoulin stouet,
Arog mont d'e labour,
Ho kalv d'hen miret. | 7. Ar c'hlanvour 'n e wele
A gav freskadur
Gant ar Vam a ouele,
Ouz kroaz he C'hrouadur. |
| 4. War gern ar menezioù,
Mesaer an denvet,
A gan ho kantikou,
E kreiz e loenet. | 8. Evit plijout dezi,
Hag obten grasou,
Heuillomp eün evelti
Hent ar vertuzioù. |
| 5. Lies e lein an od,
Liesoc'h war vor,
E ped ar martolod
Stereden Arvor. | 9. An hent. mar eo diez,
Neb a gerz enan,
Bete dor he Falez
Vo renet gantan. |
| 6. Pa zon teir gwej bemde
Kloc'h an Angelus, | 10. Neuze ni, dianken,
Tro-war-dro d'he zron,
A veulo da viken
Mari, hon Itron. K. G. |